

2 x emepithemelt J →



JANEDIG HA PERIG

Son nevez-savet gant ar barz Kastellad Francis Moal
« Alc'houeder Leon »

I

En deiz all ar plac'h Janedig
A zeaz d'ar foar gant Perrig
Pell-zo oan c'hedal an dervez
Da vont d'ar foar assamblez
Kana reent a vouez ho fenn
O vont ho daou da bourmen.

II

Aveac'h ma zint erruet
Janedig buan deuz lavaret
Ar c'hiz vraz a zo d'ar gwazet
Na da regali ar merc'hed
Evelse, ma kerez paña
Me zeï ganez d'ar sinema.

III

Ar paotr iaouank lorc'h braz ennhan
A lavaraz, deomp buan
Eun tamm brao a zo da c'hoari
Gwelet vezo Tino Rossi
Setu ho daou en heur redet
Buan da gerc'het ho billet.

IV

Aveac'h ma zoant azezet
Ar goulou kerkent ioa lac'het
A neuze ar plac'h Janedig
Lavaraz da Ber goustadig
Bremen e rankan diskwez did
Pegement a joa meuz ouzit.

V

Ag en heur gregi starti ennhan
E stagas da bokad dezhan
Ag ar paotr eb chom da nec'hi
A reaz kement all dezi
En heur lavaret « Mon amour
Je t'aime, et j'aimerai toujours. »

VI

Lammet rea ho c'halonou
Kement e strake ar pokou
Mez rabat deoc'h sonjal fall
Dije klasket ober traou all
N'heur jom honest, a beza fur
C'heller kaout ive plujadur.

VII

Pa zedo fin d'an abaden
Zoan eat adarre da bourmen
Ar plac'hig lavaraz neuze
Ma peuz leun a goa ouzin me
En distro deuz beteg va zi
Ha va goulen da zimezi.

VIII

Barz an ti pa zeo erruet
Dourn ar verc'h an deuz goulennet
Laouen braz e zor bet ounthan
Ia, a zo lavaret dezhan
Prestig e klevor o sini
Ar c'hleier vit an dimezi.

IX

Eb dale man deiz ar friko
Kleier ar barrez a dregerno
A pa vo erruet an noz
Per lavaro d'he hini goz
O va fried, na me da gar
Muic'h vit pebra war an douar.

X

Evelse, selaouit potred
Pa zeoc'h d'ar foar gant merc'hed
Ma krog ennoc'h c'hoant dimezi
Na jomit ket ta da nec'hi
Ne gousto ket deoc'h kalz a dra
D'ar red, kit buan d'ar sinema.

Reproduction Interdite.

Francis MOAL





JANEDIG HA PERIG

Son nevez-savet gant ar barz Kastellad Francis Moal
« Alc'houeder Leon »

I

En deiz all ar plac'h Janedig
A zeaz d'ar foar gant Perig
Pell-zo oan c'hedal an dervez
Da vont d'ar foar assemblez
Kana reent a vouez ho fenn
O vont ho daou da bourmen.

II

Aveac'h ma zint erruet
Janedig buan deuz lavaret
Ar c'hiz vraz a zo d'ar gwazet
Na da regali ar merc'hed
Evelse, ma kerez paia
Me zeï ganez d'ar sinema.

III

Ar paotr iaouank lorc'h braz ennhan
A lavaraz, deomp buan
Eun tamm brao a zo da c'hoari
Gwelet vezo Tino Rossi
Setu ho daou en heur redet
Buan da gerc'het ho billet.

IV

Aveac'h ma zoant azezet
Ar goulou kerkent ioa lac'het
A neuze ar plac'h Janedig
Lavaraz da Ber goustadig
Bremen e rankan diskwez did
Pegement a joa meuz ouzit.

V

Ag en heur gregi start ennhan
E stagas da bokad dezhan
Ag ar paotr eb chom da nec'hi
A reaz kement all dezi
En heur lavaret « ~~Mon amour~~ *Je t'aime, et j'aimerais toujours.* »

VI

Lammet rea ho c'halonou
Kement e strake ar pokou
Mez rabat deoc'h sonjal fall
Dije klasket ober traou all
N'heur jom honest, a beza fur
C'heller kaout ive plujadur.

VII

Pa zedo fin d'an abaden
Zoan eat adarre da bourmen
Ar plac'hig lavaraz neuze
Ma peuz leun a goa ouzin me
En distro deuz beteg va zi
Ha va goulen da zimezi.

VIII

Barz an ti pa zeo erruet
Dourn ar verc'h an deuz goulennet
Laouen braz e zor bet ounthan
Ia, a zo lavaret dezhan
Prestig e klevor o sini
Ar c'hleier vit an dimezi.

IX

Eb dale man deiz ar friko
Kleier ar barrez a dregerno
A pa vo erruet an noz
Per lavaro d'he hini goz
O va fried, na me da gar
Muioc'h vit pebra war an douar.

X

Evelse, selaouit potred
Pa zeoc'h d'ar foar gant merc'hed
Ma krog ennoc'h c'hoant dimezi
Na jomit ket ta da nec'hi
Ne gousto ket deoc'h kalz a dra
D'ar red, kit buan d'ar sinema.

Francis MOAL

Je t'aime, et j'aimerais toujours.
may him me a constant
Reproduction Interdite.

*pour commencer les 2 dernières lignes
retournele la dernière*